

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

## 122. EURED AR GLOAREK

( follennoù 96-97 )

Tad ar sperejou mad, a galon me ho ped  
 da reï din sklerijen da bozi va speret,  
 Da ober eur chanson gred en tre daou zen iaouank  
 a da esplika skler dar re a vo presant

Ken vid ma c'homansin ober va c'hanaouen :  
 unan a ne zo mal ag eun all fumelen  
 hag a deuio souden a beb eil da parlant  
 an eil oc'h e guile ewez ho santimant.

O zud po deus klevet a laka an disparti  
 ar goas a zo kasset da poursuiv e studi  
 evid bea beleget o c'horto an termen  
 Da vea unisset mez na vo birviken.

Setu e ta breman ar fumelen abandonnet  
 a mantrèt e c'halon nan deo ket eb sujet.  
 Donnet a ra ar goas evel eul languissant  
 a blesset e galon da gaout e vestrez koant.

Da houd ag hi divije chonjet a propojou  
 a laked enutul e holl promessaou :

- Debonjour deoc'h, va mestrez, trist bras ebars em c'ha-  
 Doc'h a leveret din, c'houi em graïo languissant lon  
 a mar bezit fidel din c'hui a vo fin dam tourmant.

- Pem pla varnugent zo mon var an douar  
 Ag a meus ententet kals deus a rezonniou  
 Dre mo c'heus studiet e kreten o pe c'hoant  
 Da zond dam goapad, divoëlit, den iaouank.

- Me non ket deuet aman da gonta fablennou  
 Bezet ar vadelez da sellaou va c'homzou  
 A parlantit ouzin, me o ped, pepret ingal  
 Rag c'houi a meus choazet e plass va breurial.

- 102 -

- Errio e man ar merc'her, e man anter ar sizun  
An termen a lakan, emeī, va chervicher  
Tenit o paperiou var an de divea  
A n'hi a vo embanet, emeī, disul genta.

—  
Setu an daou den man demeet ag eureujet  
Ar c'hras d'he a souetan e tren ma vint er bed  
a pa zaïnt d'ar bed all ar c'hras da zouissa.

vvvvvvvvvvvv

Moris Follezour 29 févr. 1851

vvvvvvvvvvvvvvvv